



www.tromenezare.bzh

- **Tro roz** (7 kms, 176 m de dénivelé), couleur rose : le circuit de l'Arboretum et du Canal

Ce circuit dédié aux familles notamment à celles venues avec poussettes tout-terrain, vous fera emprunter un magnifique et original tracé de plus de 1,5 kms à la découverte de l'Arboretum, site de 22 hectares dédié à la biodiversité végétale de 4 continents. Après une pause au point de ravitaillement à mi-parcours, vous gagnerez le bourg d'Huelgoat en traversant une zone toute particulièrement préservée de la forêt domaniale, avant de longer le paisible et sinueux canal supérieur.



- **Tro roz** (7 km, 176 m a zinaou), liv roz : troiad an Arboretum hag ar Ganol.

Evit ar familhoù eo bet savet an troiad-mañ, dreist-holl gant ar-re deuet gant pousetennoù holl dachennoù, ha lakaat a raio ac'hanoc'h da vont a-hed un hent brav-kenañ ha dibar hiroc'h eget 1.5 km d'ober anaoudegezh gant an Arboretum, ul lec'h a 44 devezh-arat gouestlet da liesseurterd buhez ar plant war 4 c'hevandir. Goude un ehan e lec'h-pourveziñ ez eoc'h war-zu bourk an Uhelzoad o treuziñ ul lodenn miret-mat eus ar c'hoadoù domani, a-raok mont a-hed kanol sioul ha kammek an uhel.



www.tromenezare.bzh

- **Tro wenn** (11.3 kms, 316 m de dénivelé), couleur noire (carte), couleur blanche (rubans balisage) : Huelgoat tout en Longitude (!)

Après l'Arboretum, les marcheurs longeront le canal supérieur aussi bien sa rive gauche labellisée et que sa très confidentielle rive droite, puis emprunteront le pont Rouge qui enjambe la rivière d'Argent pour accéder au pittoresque sentier du Louarn qui vous conduira jusqu'au quartier de Kervao... Puis la balade autour du lac sera l'occasion de prendre de belles photos du bourg ensoleillé et plein de charme d'Huelgoat.



- **Tro wenn** (11,3 km, 316 m a zinaou), liv du (kartenn), liv gwenn (rubanoù henchañ) : Uhelgoad a-hed a-bezh (!)

Goude an Arboretum ez aio ar valeerien a-hed ar ganol uhel kement he riblenn-gleiz balizet hag he riblenn-zehoù nebeutoc'h anavezet, a-raok mont war ar pont Ruz a dreuz ar Stêr Arc'hant da vont betek gwenojenn vrav al Louarn a gaso ac'hanoc'h betek karter Kervao... Da c'houde e vo ar valeadenn tro-dro d'al lenn an digarez da gemer fotoioù brav eus bourk an Uhelgoad dudius dindan an heol.

- **Tro vouk** (13.1 kms, 378 m de dénivelé), couleur mauve : le circuit de la Mine

De l'Arboretum jusqu'à l'entrée dans la zone préservée de la hêtraie atlantique acidiphile à houx, les marcheurs adeptes de sentiers verdoyants et forestiers modérément inclinés, iront à la découverte des infrastructures de l'ancienne mine de Locmaria-Berrien tout en passant par un village dont la présence est attestée depuis le 15ème siècle...le circuit se terminant par une petite et reposante balade le long du canal.



- **Tro vouk** (13,1 km, 378 m a zinaou), liv mouk : troiad ar Meingleuz.

Eus an Arboretum betek mont en takad miret ar faoueg atlantel trenkkarer e gelenn ez aio ar valeerien sot gant ar gwenojennoù glas ar c'hoadoù, krenn o dinaou, d'ober anaoudegezh gant dafar mein-gleuz bet Lokmaria-Berrien en ur dremen dre ur c'hêriadenn a gaver roudoù anezhi adalek ar XVvet kantved... Echuiñ a ra ar wenojenn gant ur valeadenn vihan diskuizhus a-hed ar ganol.



www.tromenezare.bzh

- **Tro orañjez** (17.6 kms, 608 m de dénivelé), couleur orange : le circuit des curiosités rocheuses

La spécificité de ce circuit est de vous proposer de voir ou de revoir les curiosités rocheuses connues mais aussi moins connues d'Huelgoat et de Berrien (la roche cintrée, la scorie, le menhir de Kerampeulven...), d'entendre le rugissement des torrents, tout en empruntant des sentiers pittoresques, enchanteurs et peu fréquentés de la forêt domaniale ainsi que ceux traversant des bois privés. Émerveillement garanti !



- **Tro orañjez** (17,6 km, 608 m a zinaou), liv orañjez : troiad ar reier dibar.

Ar pezh a zo dibar gant an droiad-mañ ez eo e c'heller gwelet pe adwelet reier heverk anavezet mat pe chomet dianav en Uhelgoad hag e Berrien (ar roc'h kelc'hiet, ar mein-luc'hed, ar maen-sav...), da glevet froud ar gwazhioù en ur vale war gwenodenoù kaer, bamus ha ne vezont ket implijet kalz e koadoù-domani kenkoulz hag a re a dreuz tachennoù pevez. Sur omp e voc'h bamet !



www.tromenezare.bzh

- **Tro ruz** (23.7 kms, 648 m de dénivelé), couleur rouge : le circuit forestier

Ce circuit forestier ne pourra que ravir les amoureux de grandes étendues forestières empreintes de quiétude, de magie et de mystère. Idéal pour découvrir ou revoir avec ou sans effort, nombre chemins et sentiers pittoresques et fleuris, peu à très peu fréquentés, publics et privés sur les communes d'Huelgoat et de Berrien. ...mais aussi pour marcher sereinement en pleine attention contemplative pour un dépaysement garanti et bénéfique !



- **Tro ruz** (23,7 km, 648 m a zinaou), liv ruz : troiad ar c'hoadoù.

An droiad goadek ne c'hello nemet reiñ plijadur d'ar re sot gant an takadoù koadet leun a sioulder, a huder hag a gevrin. Eus ar c'hentañ eo d'ober anaoudegezh peotramant gwelet gwenojennoù bleuniet brav-eston ur wezh all, gant pe diboan, gant nebeut pe nebeut-tre a dud war parrezioù an Uhelgoad ha Berrien... kement hag evit bale trenkil en ur brederiañ en un divroañ a raio vat deoc'h, sur ha n'eo ket marteze !



www.tromenezare.bzh

- **Tro c'hlas** (31.4 kms, 1016 m de dénivelé), couleur bleue : le circuit entre forêt et campagne

Dès le début de ce circuit, vous entrerez dans la belle forêt domaniale d'Huelgoat, puis vous émerveillerez de la biodiversité de l'Arboretum. La randonnée se prolongera par un parcours pittoresque, boisé et quelque peu sportif jusqu'au village de Kerampeulven et son menhir de 6m de haut ...Puis, vous emprunterez de jolis sentiers en ce moment fleuris de violettes de la campagne de Berrien, commune au nord de laquelle à été photographié récemment un canidé gris en balade...



- **Tro c'hlas** (31,4 km, 1016 m a zinaou), liv c'hlas : troiad etre koadeier ha parkeier.

Kerkent ha penn-kentañ an droiad-se ez eoc'h e-barzh e koadeg vrav domani an Uhelgoad a-raok bezañ bamet dirak liesseurted buhez an Arboretum. Pelloc'h ez aio ar valeadenn dre un hent brav, koadek ha sportel un tamm betek kêriadenn Kerampeulven hag he maen-sav 6m uhel... Da c'houde ez eoc'h dre wenojennoù kaer, leun a voked Sant-Juluan maeziou Berrien, ur barrez en norzh anezhi ma oa bet kemeret n'eus ket pell zo foto ur ganideg gris o pourmen...



www.tromenezare.bzh

- **Tro velen** (40.6 kms, 1330 m de dénivelé) : couleur jaune : le circuit des 2 menhirs

Après l'Arboretum, ce circuit moyennement sportif empruntera jusqu'au menhir de Kerampeulven une belle diversité de sentiers peu à très peu fréquentés de la forêt domaniale et privée d'Huelgoat, puis vous fera découvrir la campagne de Berrien jusqu'au menhir de Kerelcun à La Feuillée. La fin du tracé est constitué de paysages joliment boisés et vallonnés jusqu'à l'incontournable balade autour du lac.



- **Tro velen** (40,6 km, 1330 m a zinaou), liv melen : troiad an daou beulvan.

Da c'houde an Arboretum e voc'h kaset gant an troiad sportel un tamm betek maen-sav Kerampeulvan war meur a wenodenn disheñvel, implijet-kenañ pe nebeut e koadoù-domani ha prevez an Uhelgoad, a-raok lakaat ac'hanoc'h d'ober anaoudegezh gant maezioù Berrien betek maen-sav Kelerkun er Fouilhez. Dibenn an troiad a zo gweledvaoù koadet kaer ha sav-diskenn betek baleadenn tro-dro d'al lenn ha ne c'heller ket tremen hepti.